

RÉDACTION ET ADMINISTRATION :
 15, Rue des Capucins, GUINGAMP
 Chèques postaux : C/C 44-88 Rennes

ABONNEMENT

Bretagne. . . . 6 fr.
 France 7
 Etranger 8
 Ab. collectif . . 3
 (10 au moins).
 Ab. Breuriez . . 4

PUBLICITÉ

Les insertions sont annuelles
 La page 160 fr.
 La 1/2 page. . . 80
 Le 1/4 page. . . 40
 Le 1/12 page. . 15

ARVORIG a zigoueo er parrouziou benn an 20 a bep miz.

Constructions Métalliques

Jean LE FOURNIS

En face la Gare, GUINGAMP

Téléphone 1-32

HANGARS MÉTALLIQUES agricoles et industriels

Serrurerie — Grilles — Travaux d'Art

Toujours en stock **TOLE ONDULÉE** pour Toitures

Dépositaire des produits et ardoises

fibro-ciment « **EVERITE** »

R. C. 636

20, rue Saint-Yves
à
2, r. des Carmélites
R. C. Guingamp 38

ÉTABLISSEMENTS
LE JAMTEL FRÈRES
GUINGAMP (Côtes-du-Nord)
TOUS ARTICLES de QUINCAILLERIE, MÉNAGE
MACHINES AGRICOLES



ENTRÉE LIBRE

Téléphone 27

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
o embann en « **ARVORIG** »

LA NOUVEAUTÉ FRANÇAISE

Grands Magasins de Nouveautés

LES PLUS IMPORTANTS DE LA RÉGION

CHARETON-DRONIOU

GUINGAMP, 25, Place du Centre

SAINT-BRIEUC, 16, Rue Saint-Guillaume

TISSUS EN TOUS GENRES

DRAPERIE — SOIERIE — TOILES

CHALES — TABLIERS BRETONS

CONFLECTIONS POUR HOMMES, DAMES & ENFANTS

LINGERIE — BONNETERIE

CHEMISES — COLS — CRAVATES

GANTERIE — MERCERIE — PARAPLUIES

Meubles — Literie

ARTICLES DE VOYAGE

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
o embann en « **ARVORIG** »

R. C. GUINGAMP 37

M. LE BRAS

Chirurgien - Dentiste

AVENUE DE LA GARE

GUINGAMP

Ar merc'her e Callac, Hotel Montfort

Maison DENIEL

Bourrellerie — Sellerie

Articles de sports

Voitures d'enfants

25, rue des Ponts-Saint-Michel

GUINGAMP

FABRIQUE DE PARAPLUIES

Anciennes Maisons Dufour et Lémecillet

Yves MARTIN, Succ^r

Cannes, Réparations, Recouvreages

GROS & DÉTAIL

Place du Centre — GUINGAMP

Ancienne Maison ROCHETTE

CLOAREC

CHARCUTIER

1, rue des Ponts-Saint-Michel

GUINGAMP

EPICERIE DE CHOIX

Y. LE GUEUT

Rue Saint-Yves — GUINGAMP

VINS & SPIRITUEUX

Pâtisserie — Confiserie

Glaces et Sorbets

Pièces montées — Entremets

Félix PINSON

12, Place du Centre - GUINGAMP

Vins et Spiritueux en Gros

Vins de Messe

Mme Louis LE CLEC'H

4, rue du Grand-Trotieux

GUINGAMP

Epicerie Centrale et Parisienne

LE PERRON & MEUDIC

Correspondants de la Maison Félix POTIN

29, rue des Ponts-St-Michel

GUINGAMP

LE CUN

Pharmacie

Optique — Photographie

Place du Centre - GUINGAMP

PEINTURE & VITRERIE

Ch. THÉBAUT

25, rue Saint-Yves - GUINGAMP

Grand choix de papier moderne

JULIENNE Frères

TISSUS EN GROS

GUINGAMP

CHAPELLERIE & MODES

CASQUETTES D'UNIFORMES

ROBILLARD

19, Place du Centre, 19

GUINGAMP

Chaussures en tous genres

F. DESGRANGES

21, Place du Centre, 21

— GUINGAMP —

Dilhad ha Danve
evit potred ha merc'hed

LE FRIEC-KERLEAU

Tost d'an Iliz

GWENGAMP

Ornements d'Eglise

Bronze et Orfèvrerie

Atelier de dorure et d'argenture

G. LE POUULLOUIN

12, rue de la Trinité, GUINGAMP

LELIÈVRE

Charbons et Bois

4, rue de la Trinité - Guingamp

Maison UNVOAS

CHARCUTERIE

-:- Spécialité d'andouilles

Pâté de foie gras -:-

42, rue Notre-Dame - GUINGAMP

PÂTISSERIE — CONFISERIE — GLACES

Ancienne Maison LE BAIL

MARTINET, Successeur

43, Place du Centre

GUINGAMP

Gros EPICERIE Détail

LE DÉRÉAT & BONNO

6, rue des Ponts-Saint-Michel

GUINGAMP

HORLOGERIE BIJOUTERIE LUNETTERIE

Bagues pour Mariages

Montres de précision : Omega, Unic, etc.

F. ELLIEN

45, rue Notre-Dame -- Guingamp

— RÉPARATIONS —

Epicerie Vins et Spiritueux

FRUITS — PRIMEURS

Ancienne Maison GUIDON-CHARETON

J. POGAM, S^{eur}

37, place du Centre - GUINGAMP

Télex. 30 Produits de choix

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
o embann en « ARVORIG »

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
o embann en « ARVORIG »

MACHINES AGRICOLES TANVEZ

Moteurs — Batteuses — Manèges — Coupe-Racines
Broyeurs d'Ajoncs — Hache-Paille

MATÉRIELS DE CIDRERIE PERFECTIONNÉS

Derniers Concours { LAIGLE 1921, 1^{er} PRIX, Médaille de Vermeil
LISIEUX 1923, 1^{er} PRIX, Médaille d'Or
DIPLOME D'HONNEUR de l'Association Française Pomologique

TRIEURS DE POMMES DE TERRE « MÉLIOR »

Derniers Concours { VERSAILLES 1922, 1^{er} PRIX, trieurs à bras
REMY (Oise) 1923, 1^{er} PRIX, trieurs industriels

USINES TANVEZ

Société Anonyme au Capital de 1.500.000 Francs

“La Tourelle” Registr. du Commerce n° 100 et 1260 **GUINGAMP**

An holl dilhad

evit ar botred hag ar vugale

== A L A == R. C. Guingamp 2.926

“Grande Fabrique”

41, rue Notre-Dame, **GUINGAMP** — & — rue Gambetta, **ROSTRENEM**

== A == | | == A ==

“Paris-Tailleur” “Paris-Tailleur”

Place du Centre, **LANNION**

TRÉGUIER

Marc'hadourez vat ha marc'had mat

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
o embann en « ARVORIG »

H. JAN

CHIRURGIEN DENTISTE

Reçoit les Mardi, Mercredi, Jeudi, à **LANNION**
les Lundi, Vendredi, Samedi, de 9 heures à 5 heures
37, Place du Centre -:- **GUINGAMP**

BOIS
du Nord

PICHON
Petit-Paris
PLOUMAGOAR

Fruits, Epicerie, Primeurs
:: Bonbons Fins ::

JÉGOU - LE PAGE

50, Rue Notre-Dame - **GUINGAMP**

Spécialité d'oranges :: Dépôt d'huîtres

Hippolyte URVOY

* CYCLES * * MOTOS *

33, Rue Notre-Dame, 33 -:- **GUINGAMP**

VEND des Bicyclettes de toutes Marques
ACHÈTE et de
RÉPARE toutes Provenances

GRAND CHOIX DE BICYCLETTES ET D'ACCESSOIRES

Garantis des meilleures Marques et des meilleurs Prix

LOCATION

D'AUTOS



URVOY
Cycles
GUINGAMP



25 AU BON ACCUEIL 25

BOGRAND Frères

En Face de la Poste -:- **SAINT-BRIEU**

An holl gwiskamanchou hag an holl danve
Bretoned ! E ti BOGRAND e kaver marc'hadourez vat
ha marc'had mat ; et da welet !

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
o embann en « ARVORIG »

ARVORIG

Kelaouenn vizek Treger ha Kerne

Renner : E. AR MOAL, Coadout

A voul bep miz soniou, marvailhou, istor ar Vro,
helennadurez war ar relijion, war al labour-douar, etc...

PRIZ : 2 skood ar blâ evit Breiz, adalek Genver 1924.

Arc'hant ha koumananchou a ve digemeret

Administration ARVORIG, 13, rue des Capucins, GUINGAMP
N° Cheque postal 44-88, RENNES

Skrivagnerien :

Draskik. — Barz Mene-Bre. — Abad Joanno. — Gab Liskildry.
— Kloareg ar Wern. — Eur Mignon kristen ha breizad. —
Y. M. G. — Yan Grenn. — Tadig. — An Eün. — Didicho.
— Pôtr Juluen. — E. d'Herbais. — Ar Yeodet. — Karevro. —
Eur Mestr-skol kristen. — B. L. — Mabnoni. — Digabestr.
— Roc'hlan. — J. C. — Pendero. — EvnigArvor. — Skrilh
Mene-Bre. — E. Kerou.

Skrivagnerien goz maro aboue ar brezel (1914 1923) : LOEIZ
PORZ-IKEL. — MELIAP. — A. PORZER. — LAOUIC. — GWELTAS.
KOULMIG ARVOR. — M. COTTIN.

N. B. — Al labouriou a dle bean digouet gant ar rener 'benn an 20
da voulan er miz warlerc'h.

BANQUE DE BRETAGNE

Société anonyme : Capital 10.000.000 francs

Siège Social à Rennes

R. C. Rennes 56

Agence à Guingamp, rue Saint-Yves

Bureau à Callac

Toutes opérations de Banque et de Bourse



Délivrance de Bons de la Défense nationale

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus fennet
o embann en « ARVORIG »

12th BLAVEZ

Niverenn 8

Miz Eost 1924

ARVORIG

Kelaouenn Vrezonek Treger ha Kerne

TOLENN AR MIZ. — Hon muzik, hon yez enoret gant an Otrone
Eskibien. — Ar prijou e Skolaj Itron Varia Gwengamp. —
Breuriez ar Brezoneg. — Eur pardon breton, E. — Gouelioù
keltiek Kemper. — Red lâret c'hoaz, AR YEODET. — Tro Breiz,
Y. M. G. — Kanaouenn ar marloù tregeriad, EVNIG PENN-
AR-C'HOAD. — Kantik I. V. ar Yeodet. — An daou vreur evel.
X. — Dre ar garante. — Argoad-Arvor. — Ar galleg dre ar
brezoneg, ABAD BOZEC.

Hon muzik hag hon yez enoret

Kardinal Breiz, an Otrou Charest
a rent enor d'hen c'hân broadel

*Eur mignon eus Roañn a skriv kement-man da « Ar-
vorig » :*

« Dec'h da noz, an O. Gourvil, rener « Ti Breiz » e
Montroulez, a zo deut aman, war digare ar « Semaine
Sociale », d'ober eur brezegenn war gan, war ar muzik
brezonek. Kalz a blijadur en deus grêt d'an dud a oa
deut, niverus, d'e chilaou. Da glozan, e voe kanet *Bro-
Goz ma zadou*, an diskan lavaret gant eul lodenn vat
eus an dud a oa eno. An holl a oa savet en o zav. Ar
c'hardinal Charest, hag a oa penn-rener ar vodadeg-man,
a oa ive en e zav o chilaou kanan hon c'han broadel. »

Otrou 'n Eskob Tarb hag ar brezoneg

Len e reomp e « Feiz ha Breiz » miz eost:

« D'an deiz diveza ma oa pirc'hirinaj Kemper e Lourd,
(bremen 'zo miz), goude prosesion ar Zakramant, Aotrou
'n Eskob Tarb ha Lourd a lavaras da eur chaloni a
Gemper ar c'homzou-man: « Penaoz, emezan, c'houl ho
peus eur yez, ar brezoneg, hag a lavar, e galleg, ar pe-
dennoù d'ar Zakramant! Ra vo meulet ha pedet ar Za-
kramant e peb yez, e galleg, met ivez e brezoneg! »

E niverenn kentan *Arvorig* 'benn mont da Lourd, e
vo kavet ar pedennoù d'ar Zakramant, e brezoneg, ma
c'hell hon zud o lavaret en o yez, evel m' her goulenn
Otrou 'n Eskob Lourd.

Ar prijou e Skolaj an Itron Varia

GWENGAMP

Skol vrezonég (1)

EIL KEVRENN

Labouriou dre gomz

- 1 Priz François Courtois, eus Koadout, ha Victor Ellien, eus Pommerit-le-Vicomte.
- 2 — Yves Mahé, eus Lohuec, hag Edmond Dupuis, eus Perret.
- 1 Access. François Dromaguet, eus Plounez, ha Pierre Boulbin, eus Gwengamp.
- 2 — Théophile Gautier, eus Plijidi, hag Yves Le Roc'h, eus Callac.
- 3 — Yves Bombony, eus Boulvriak.
- 4 — Victor Libouban, eus Panvrit.

Labouriou dre skrid ha troidigez

- 1 Priz (2) François Courtois.
- 2 — Pierre Boulbin ha Victor Ellien.
- 1 Access. Jean Guégan, eus Louargat, hag Yves Le Roc'h.
- 2 — Yves Bombony, hag Yves Mahé.
- 3 — Edmond Dupuis ha Théophile Gautier.
- 4 — François Le Roux, eus Moustéru.

KENTAN KEVRENN

Labouriou dre gomz

- 1 Priz (3) Joseph Le Bolloc'h, eus Kervoroë'h.
- 2 — Louis Dollo, eus Pludual, hag Yves Le Goas, eus Bear.
- 1 Access. Jean Gouriou, eus Carnoët.
- 2 — Paul Gouranton, eus Carnoët.
- 3 — Louis Salaün, eus Goudelin.

Labouriou dre skrid ha troidigez

- 1 Priz (4) Jean Gouriou.
- 2 — Jean Cottin, eus Panvrit, ha Louis Salaün.
- 1 Access. Joseph Le Bolloc'h.
- 2 — Louis Dollo.
- 3 — Henri Corbel, eus Ar C'hastell.

(1) Ar skol-man 'zo 'vit ar skolaerien kazi grêt o studi gante ha n'emaent ket da vont raktal da glask o diplom hag o deus c'hoant da vean barrek da lenn ha da skrivan o yez, ar brezoneg.

(2) Priz kinniget gant an O. E.-A. Moal, rener **Arvorig** ha **Breuriez ar Brezoneg**.

(3) Priz kinniget gant an O. 'n abad L. Le Clerc, a zavas **Skol vrezonég** skolaj Gwengamp.

(4) Priz kinniget gant an O. 'n abad L. Bifer, person Sant-Fiakr.

BREURIEZ AR BREZONEG

Lennadeg vrezonég e Ploueg-ar-Mor

Lennadeg vrezonég a zo bet gret e Ploueg-ar-Mor, ha setu aman, dre renk, hanoiou ar vugale o deus bet prijou :

POTRED (12 vlâ)

Kentan priz : François Grégoire.

Eil — : Pierre Guilcher.

» : Yves Maigat (Klandry).

Accessit : Adolphe Savidan, Pierre Morvan, Jean Druel, Guillaume Goeffec.

MERC'HED (Eil Pask)

Kentan priz : Maria Tenv.

Eil — : Louise Nicol.

» : Amélie Saux.

Accessit : Anna Goeffec, Madeleine Merrer.

POTRED (Pask kentan)

Kentan priz : Pierre Saux.

— : Jean Morvan.

Eil priz : Yves Deschamps.

Accessit : Yves Piver (12 vlâ), Joseph Lasbleiz, Yves Maigat (12 vlâ), L. R.

MERC'HED (Pask kentan)

Kentan priz : Marie Collet.

Eil — : Yvonne Meur

Accessit : Joséphine Mataguez.

— : Louise Jégou.

Prenet, lennet, roet en priz :

BUHE AR ZENT :

Priz : 7 fr. 50, dre ar post. — Pa brener 6, Priz : 6 fr. hag ar frêjou-kas ouспен.

Administration **Arvorig**, 15 rue des Capucins, Guingamp, c/c 44-88 Rennes.

Eur pardon breton : Pardon Sant Iltud

Aman, pelloc'h, hon mignon ha kenlabourer **Ar Yeodet** a ra meulodi ar gouelioù brezonek. Mar savet gouelioù en ho parrouz, emean, war digare kemer eun tamm didu, na zavet ket a ouelioù gallek. Perak ? Ne blijont ket. Perak c'hoaz ? Abalamour e tizroet ho ken-vroiz diwar o roudenn...

Nebeut a ve kavet hirie da zislâret war ar poent-ze, hag ar re her gra, peuruian n'ouzont ket a c'hallig, nemet tammou tapet diwar ar flip. Mar deo eur blijadur klevet anê o kêzeal brezoneg, eun drue eo klevet ar peziou galleg a ziskolpont...

Pelec'h out, Prosper Proux, roue ar wapaerien ? Hirie c'hoaz tije kavet peadra da dognan da bluenn o flemman meur a fougeer hag a fougeerez (1) !

Peuruian, koulskoude, ar yaouankiz, gwad breizad rik en o gwazied, a deu da heuilh penn-da-benn ali **Ar Yeodet**; mar boa unan dall bennak, didallan a reont; digeri ra o daoulagad d'ar wirione : pep hini e yez : « Ar galleg d'ar C'hallaoued ! Ar brezoneg d'ar Vretoned ! »

N'eo ket pôtrez yaouank parrouz Koadout a zislâro war gement-se, rak savet o deus, er blâ-man, gant pardon o faeron, S. Iltud, eur gouel hag a ra enor d'ean koulz ha d'ê o-unan, eur gouel brezonek penn-da-benn. Heman a voe grêt al lun, de an adpardon.

Ar zul a voe eun devez a lidou kaer, a gân, a vuzik hag a bedennoù. Ne oa ket bet roet biskoaz kement all a dro hag a don d'an treo; skolaj an I. V. Wengamp he doa kaset he muzikerien ha pemp beleg gante. — An otrou Person en devoa greet eus ar c'haeran an iliz hag ar vered ha digoret frank e galon d'ar bardone-rien; an otrou Sant-Iltud a roas, evit gallout peur-ober pep tra evel ma oa dleet, amzer vat.

An O. Gonidec, person Kamlez, ar pardoner, a oa stad ennan, o welet pegement a neun an nevoa ar gouel hag a gavas da veuli S. Iltud, — hag e barrou- sianiz, — komzou a zoare ha leun a gelennadurez.

Al lun, e voe tro ar gouel brezonek. N'eus nemet vad da lavaret diouz c'hoarierien **Eil beaj S. Iltud** ha **Pôtr e vragou berr**, ha koulskoude, nebeut amzer o doa kavet da blêal gant o feziou. Pep hini o vean gant e

(1) Gwelet *Bombard Kerne*, gant Prosper Proux.

labour war an de, ne veze gallet kregi el leyriou ha studian nemet en noz. Met pa ne ve ket kollet an am-zer, dibôt eo ne ve gallet ober gantan. Arvorig o bour-veaz lod eus danve ar gouel : **Heritourien Fanch Kef- leg, Kenavo**, Sôn ar jistr; levr **Soniou Feiz ha Breiz**, eul lodenn all : **Dalc'h sonj, o Ereiz-Izel, Yan ar pôtr mat**. Dalc'het e vo sonj eus hanoioù hon c'hoarierien, ken- tan re a voe stummet etouez yaouankiz Koadout. E oa, en **Pôtr e vragou berr** : Job ha Yan (Y. Le Gall ha J.-M. Lafout); Kluden (Y. Mahé); Pierig (Y. Cozler); an Amezeien (Poessel ha Vincent); Fanch (L. Perrot); Mona (Jeanne-Marie Ropars); — en **Eil beaj S. Iltud** : Sant Iltud (Louis Corson); Katel (Joséphine Milon); Fanch (Al Lan); Iltudhag Erwanig (Jégou Y. ha Jé- gou F.). Diredet e oa tud da azean e lein ar vered, az- eün d'an teâtr diwanet eno, en eur ober eun eurvez, e disheol ar gwe kistin, e kichen tour Sant Iltud. Plija- dur o doe, hep mar, rak pep hini a gavas re verr an abadenn.

Otrone beleien ar c'hanton, en o fenn, an O. Men- gny, person Koadout, a voe koulz d'al lun 'vel d'ar d'achui eno pardon S. Iltud; stad en dud hag er c'hoar- ierien ouz o gwelet.

Trugare d'ê ha trugare, dreist-holl, d'an O. Men- guy, person Koadout, a voe koulz d'al lun 'vel d'ar zul, e penn kement a voe grêt, ha na espernas na poan nag amzer 'vit enori S. Iltud ha kreski brud vat ar barrouz.

E...

Mouez ar c'hanol

Ha klevet hoc'h eus c'houi ar c'hurun o strakal
Ha mouez ar gwagennoù war an ôd o trouzal?
Ar gwad er gwazioù a fell d'ean sklaskan,
Pa deu ar voubou-ze er skouarn da fralhan.

Mouez ar mor e fulor ha mouez ar c'hurunou,
Euzusoc'h evite nan eus ket a vouezioù;
Kichen mouez ar c'hanol n'ht netra, koulskoude;
Heman war an dachenn a gri forz noz ha de.

Eur youc'hadenn spontus; ar maro 'velse 'youc'h,
Pa falc'h ar zoudarded, vel an ed er parkou...
Mouez ar c'hanol 'zo kri pa zislonk e dennou.

Hed-ha-hed al linenn, heb ehan ve klevet,
Droug ennan, o yudal, 'vel eun diaoul penfollet;
Outan, Gwerc'hez Santel, dalc'had hon diwallet.

Pôtre Julien.

Nouilly, genver 1918.

Gouelioù keltiek Kemper

(6-14 gwengolo 1924)

Ar Bleun-Brug — Gouel an Drapoioù

Lennerien **Feiz ha Breiz** o deus bet gwelet en o c'he-laouenn, breman zo tri miz, ar roll war e hed eus ar gouelioù bras a vo grêt e Kemper, etre ar 6 hag ar 14 a viz gwengolo, evit enori an holl broioù keltiek. E kerz ar gouelioù-ze, en em gav ar **Bleun-Brug**, an hini kae-ran anê, gant lid an **Drapoioù breton**.

Ar **Bleun-Brug** a bado daou de : 10 hag 11 a viz gwengolo. Setu aman roll ar B. B. evel m'eo bet moulet e F. ha B. miz eost :

Ar gouel a zo renet penn-da-benn gant an O. Duparc, Eskob Kemper.

I. — 10 A VIZ GWENGOLO

Da 7 eur, oferenn e Ty Mamm Doue.

Da 9 eur, prezegenn an A. Dujardin evit digeri ar studiadeg.

Da 10 eur nemet kart : *Gwiskamanchou ar Vretoned*, gant an A. Viol, eus a Gerfeunteun.

Da 10 eur hanter : *Unvaniez an ilizou kristen, er broioù keltiek*, gant an Tad Trebaol, eus a Rom.

Da 11 eur ha kart : *Breiz o tihuna*, gant an A. Hvard, eus a Zant-Malo.

Da 2 eur : *Ar brezoneg, en ti hag e kêr*, gant an A. Moal, Rener « *Arvorig* », eus a Goadout.

Da 3 eur nemet kart : *Ar brezoneg en iliz hag er skol*, gant an A. Uguen, chaloni a enor, rener skolach Pont-Kroaz.

Da 3 h. 1/2 : *Ar brezoneg e bro an Naoned*, gant an A. Berr, Rener Bretoned an Naoned.

Da 4 eur 1/4 : *Daoust hag ar Vretoned divroet a zo gouest da virout o brezoneg e mesk ar boblou all*, gant an Doktor Perquis, Rener Bretoned Tour.

Da 8 eur e vo diskleriet eur pezh-c'hoari kaer gant Potred Bignan.

II. — 11 A VIZ GWENGOLO

Da 7 eur, oferenn e iliz Lok-Maria.

Da 9 eur ha kart, oferenn war gan, e iliz-veur Sant Kaourintin.

Kerkent goude e vo kenstrivadegoù ar c'han, al lenn hag ar brezegerezh.

Da 2 eur, e vo c'hoariet *Yann Landevenneg* hag an *Hini goz*.

Da 5 eur, war blasenn Sant Kaourintin, e vo kanet kanaouennoù ar broioù keltiek ha, raktal goudeze, e vezo roet bennoz ar Zakramant en iliz veur, da beur-gloza ar gouelioù.

**

Gouel an drapoioù a vo grêt ar zul 7. — Da 11 h. 1/2, oferenn gant prezegenn, vo binniget enni an drapoioù. — Da 3 eur, — Gouel an drapoioù.

Petra eo kement-man ? En e gelaouenn, **La Bretagne intégrale**, an O. L'Estourbeillon, rener **Kevredigez Breiz**, hag en deus intantet ar gouel-man, a lavar eo savet 'vit lakat da advevan doare koz hon c'hêrioù ha parrouzioù, o doa gwechall, kalz anê, « armoù » pe ardamezioù, evel m'en deus an noblans c'hoaz en de a hirie. An ardamezioù-ze a zo bet lezet a goste ababue ar Revolution, evel kalz a dreo all. Eun dôlenn dudius a vo gwelet anê, neve vinniget (koulz lâret neve adva-deet), o tont ermêz eus an iliz, 'vel eur Vreiz neve o c'henel, hag o vont dispak kaer dre ar ruioù, douget gant tud a bep korn ar Vro.

Setu aman, betek hen, hanoioù ar broioù, kêrioù ha parrouzioù a gaso o drapoioù da ouel Kemper. — Broioù :

La Mée, Les Mauges, Nantes, Retz, Guérande, Rennes-Vitré, Vendelais, Coglès, Dol, Poudouvre, Montauban, Montfort, Bain-la-Guerche, Lohéac, Dinan, Penthievre, Goelo, Trecoir, Pou-Castel-Montroulez, Léon, Ach ha Kemenet Ilis, Porzay, Poher, Keraou, Cap, Pont-l'Abbé, Cornouaille, Conq, Porhoet, Quemenet - Guingamp, Broereh, Pou-Belz-Auray, Rhuys, Rieux, Rohan ;

Kêrioù ha parrouzioù :

St-Méen, St-Nicolas de Redon, Dinard, Ouessant, La Roche-Bernard, Loudéac, Mauré, Guingamp, Lannion, Carantaër, Avesnac, Fougères, Cavan, Bourbriac, Landerneau, Vannes, Rennes, Concarneau, Redon, Er-cé-près-Fossé, Donges, Lanvaux-Grandchamp, Langoet-Elven, Arz (Ile d'), Daoulas, Josselin, Crozon, Arradon, Sévraec, Rostrenen, Pipriac, Questembert, Vay.

Étreze holl, 69.

Biskoaz ne voe gwelet seurt ambrougadeg o vont dre ruioù eur gêr a Vreiz. Digoneout a reio tud a vil-vern, dreist-holl, Bretoned, e Kemper, gant ar gouel-ze.

'Vit rei d'ean muioe'h a lufr, hag ive evit zikour ouz an dispign bras a vo grêt da zevet eur proesion ar seurt-ze, ar Vretoned a zo pedet start da gas o frot d'an O. L'Estourbeillon, 10, place de l'Evêché, Vannes.

Red lâret c'hoaz !

Nag e skwizfen ma-unan ha nag e torfen penn lenne-rien *Arvorig*, e lârin eur wech ouspenn hag e adlârin, diouz red, eur wirione anaveet gant an holl, rak diazeet eo war ar skiant-prenan. Ha koulskoude, nag a hini a dro diwarni!

Breman e welomp strolladou pôtrede yaouank o sevel en pep tu evit didui o c'henvroiz gant kanaouennou ha peziou c'hoari. Kement parrouz he deus eun dornadig tud yaouank kristen, d'ê eun tamm deskadurez ha youl vat, à c'hell sevel enni lazioù-kanan ha peziou-c'hoari. Eun evurusted hag eur blijadur eo evit ar bôtred yaouank hag eun diduamant evit ar bobl, lâret em eus. Hep kontan e teu kement-se da lakat buhe er yaouankiz, da rei lufr d'ar barrouz ha, dreist-holl, da hadan er sperejou menoziou neve.

Goulennet kentoc'h digant ar veleien galonek a zo e penn kelc'hiou-studi pe strolladou evelse!

Ma! Daoust ma laka dalc'hmad ar bôtredou yaouank kalz a boan, o labour a zougfe c'hoaz muioc'h a frouez, ma karfent chom Bretoned, da lâret eo, ma karfent implian bep gwech ar brezoneg.

Ha ne reont ket, siouaz! Netra muioc'h c'houek eget eur ganaouenn vrezonek kanet brao ha distaget reiz. Netra muioc'h plijadurus, kennebeut, eget eur pez-c'hoari en hon yez, elec'h ma weler peb arvestour êzet en e zilh, rak e zilh ad int; anaoudek eus e lodenn, rak er gêr eman; reiz ha klok en e gomz, en e zoare c'hoari, rak en e stern eman ive! Ha ken divalo all, ken poanius all eo e welet en diavêz e stern o finval, e-mêz e spered broadel, o c'hoantad didual ar re all, — hag hen dall e-unan... En eur ger, an dilhad estren a zo war e choug a lem digantan e dalvoudegez a Vreizad: n'eo mui hen e-unan!

Ne baquezin ket da lâret eo diskiant c'hoari peziou gallek da Vretoned, gant Bretoned. Pep pobl he yez. Ar galleg d'ar C'hallaoued; ar brezoneg d'imp-ni, Bretoned!

Aboué eun nebeut miziou, wardro eur blâ, a demdoût, eo digouet ganin gwelet meur a vodadeg pôtrede yaouank, a gendalc'h pe a ouel brezonek. Ac'hanta, dre holl elec'h m'eo bet roet an troad d'ar brezoneg, plijadur a-leiz; elec'h ma trec'he ar galleg, gouel moredu, tud dizablant; elec'h ma veze c'hoariet gant an diou yez, a heb eil, a heb eil ive ar blijadur.

N'eus ket da lâret, mar fell d'imp kaout gonid, ober vad ha plijadur war an dro; mar fell d'imp sevel spered hon c'henvroiz hag e zerc'hel en e roudenn, kemeromp hon yez evel diaze. O heul ar yez eman ar vroadelez a-

bez ha kement a zo stag outi. Hon goueliou neuze a zougô frouez ha ne glevomp ket, goude, komzou evel ar re a glevis, n'eus ket pell, diwarbenn eun nebeut pôtrede yaouank eus ar gwellan a ganas re a c'halleg en eur gouel: « Ni a zonje d'imp e vije bet kanet en brezoneg ha ne oa bet nemet galleg; kentan gwech, avat, n'efomp ket... »

Kredet ac'hanon, pôtrede yaouank kristen hon farrouziou, c'houi hag a anve ho kenvroiz, desket dalc'hmat kanaouennou ha peziou-c'hoari en yez ho pro. Muioc'h e plijont eget ar re all, kalz muioc'h. Kement-se a zo anat d'an holl; kement-se a welomp hag a glevomp bemde.

Ho tever eo ober an dra-ze, abalamour ma plij d'ho kenvroiz; ho tever eo ober an dra-ze abalamour eno eman hon roudenn-ni; ho tever eo ober an dra-ze abalamour eno eman ar wirione; hag ho tever strisan eo ober an dra-ze abalamour kalz eus ho kenvroiz, dallet, a dec'h diwar o diaze, a dro kein d'o Broadelez.

N'ankouamp ket, ho pet sonj, ez omp Bretoned hag e kavomp en stern hon Gouenn kement a ra ouzimp eur bobl dishenvel war ar vad, eur bobl dispar: poell, furnez, kredennou, evurusted.

Dalc'homp d'hon Brezoneg en hon goueliou, pa lâran! Na reomp ket evel an diskiant a droc'h ar skourr a zo dindan e dreid!

AR YEODET.

LEORIOU NEVE :

Essai sur la Question bretonne, par Y. LE MOAL, secrétaire du *Bleun-Brug*. — 1 fr. 15 franco. — 20 0/0 de remise par quantités.

An « Hini Goz » o vont da dennan he foltred, pez c'hoari evit merc'hed yaouank, gant D. N. D. — 1 fr.

O goulenn : 15, rue des Capucins, GUINGAMP, c/c 4488 Rennes.

FEIZ HA BREIZ HA KROAZ AR VRETONED

HAG AR C'HORN-BOUD

(Kelaouenn viziek gant skeudennou)

Abonnement : Bretagne, 8 fr. — France, 9 fr. — Etranger, 10 fr.

Administration : F. GEORGELIN, 4, rue du Château, Brest C/C 44-40, RENNES

Lenn, p. 12^e ar gola, embann ar c'helaouennou all.

TRO BREIZ

Ilizou ha Chapellou koz a Vro-Dreger

CHAPPELL SANT-LAVANT

Deomp war hon c'hiz da vourk Plouneve, dre an hent real, krec'hiek da vat, ha kemeromp hent Milin Richard. Digouet e kêriadenn Kerfeilhen, e welfomp, etouez glazur ar gwe, eun tour o lintran dindan bannou an heol. Traouienn al Leger n'eman ket a-bell; chapell an Dreinded a zo a-dal hag a-gle zo eur zaonenn goant e fell treuzi evit arruout e kichen chapell sant Lavant. Ne gav ket d'in e vefe koantoc'h lec'h/er c'horn-man a Vreiz-Izel.

Aman, ti ebet, hent ebet, vit lâret; eur wenojenn a gaso ac'hanoc'h da gichen mogeriou distô, eun tourig hep kloc'h, hag ho lako souezet, betek lâret: Penôs 'ta eo bet lezet da bladenn tōenn eur chapell hag a dlee bean ken kaer gwechall? Eun drue eo gwelet anei evel m'eman!

Gortozet eun nebeut miziou ha, mar be bolante Doue, ma chom e yec'hed gant eur beleg en deus, arôk kent, diskouet e garante e kenver sent koz Breiz-Izel, en eur gaerat eun iliz neve gant gwer a liou a doug o skeudennou, e c'hallfet dizrei da zant Lavant ha gwelet eur chapell goz adnevet, kempennet he mogeriou mein benerez, laket warni eun dôenn neve, lambrusket he diabarz ha gouest da jachan c'hoaz, evel en amzer drement, Bretoned troet da bleustri al lec'hiou santel e kaver enne diskwiz, frealzidigez ha dudi.

Neuze, pôtr an ilizou koz, ma ve beo, a gemero c'hoaz e bluenn hag e delenn da gontan ha da ganan doare ar chapell

Diazeet etouez ar gwe
Ha war grapenn eun tamn mene,
Chapell sant Lavant Plouneve
A adsavo c'hoaz hepdale.

Y. M. G.

Grêt c'hoari peziou brezonek, evel :

Tog Jani ha pôtr e vragou berr : 1 fr. 50

Yan pôtr ar gêr : 0 fr. 50

Klenved ar medalennou : 2 fr.

15, rue des Capucins, Guingamp, c/c 44-88 Rennes.

KANAOUENN AR MARTOLOD TREGERIAD

*D'an O. E. Le Clerc, breizad ha
lenner « Arvorig », en Paris.*

War dôn : « **Le biniou** »

I

Me 'zo ganet e Landreger,
An Arvor eo ma Mam-Vro !
D'an douar, ter gwech pe beder,
Martolod, 'm eus grêt an dro.
Daoust pegement am eus redet
Ar broiou ar muian brudet,
N'am eus c'hoaz kavet hini
Da dalvezout hon Bro-ni.

Diskan :

Bro Treger, me 'zô d'it bugel,
Ha me gar c'hanout
Dreist d'an holl broiou !
Birviken n'halfen dilezel
Na dont d'ankouaout
Bro ma zadou !

II

En em farrouz, pa oan krennard,
Nag am ije plijadur,
O vont da guz, 'vel eur c'hluward,
Mesk al lann hag ar glazur ;
Hag e kreiz sioulder ar mêziou,
Lec'h ma kan an evnedigou,
Me 'chome betek an noz
Da lenn istôr ma Bro goz !

III

Eun devez, o vont dibreder
Hed-ha-hed gant ribl ar mor,
E klevis eur plac'hig tener
O kanan war doull he dor ;
Hag ouz he gwelet, me 'zonje
Penôs ma plije d'in bale
Vije gwelloc'h d'in, sur mat,
Biken Bro Treger kuitat.

IV

'Benn eur pennad amzer aman,
Pa vin skwiz o tornan dour,
Adarre me 'c'h ey da vevan
Du-hout, e disheol an tour.

Diouz « Kervarzin » da « Berwenan »,
Dinec'h evel eul laouenan,
Me 'c'hortozo termen Gorr
Da vont da welet Sant Per !

V

Kenvroiz, tudou kalonek,
Me ho ped, dalc'homp ervad
D'hon gizioù koz, d'hon brezoneg,
D'hon fe ken start ha d'hon gwad !
Karomp, c'hoarzomp, bezomp seder,
Met hep dizrei diouz an dever,
Ha , 'vit achui ar zôn,
Kanomp holl a greiz kalon :

Evrig Penn-ar-C'hoad.

AR BRUG

I

Ar brug a ziwan
En krec'h al lanneg,
'Barz an henchou moan,
War lein ar garreg,
Er c'hoajou dedan,
War vord an ôcho ;
Ar brug a ziwan
Dre-holl en hon Bro.

II

Bokedenn a-bed
Na dalv ar brug ru ;
Redet 'm eus ar Bed
Diouz a gement tu,
A-dreuz hag a-hed ;
Neblec'h ne weler
Bokedenn a-bed
Ken koant, ken tener.

III

Ar brug, en Arvor,
En despet d'ar c'hiz,
Zo vel eun tenzor
Vit ar yaouankiz ;
Ar Barz, gant enor,
Hen stag ouz e skoa :
Ar brug en Arvor
Zo douget gant joa.

IV

Ar brug hag hon Breiz
A zo breur ha c'hoar ;
Blaveziou a-leiz
N'hallfont o diskar.
Dousder 'zo n'o c'hreiz
Ha nerz war an dro ;
Ar brug hag hon Breiz
Dalc'hmad a vevo !

Evrig Penn-ar-C'hoad.

LES LETTRES

Revue mensuelle, 4, Boulevard des Italiens, PARIS (IX^e)


Religion, Sociologie, Philosophie, Histoire, Littérature, Art

Abonnement: 25 fr. l'an. — Le numéro: 3 fr.


Numéros spécimen sur demande

Kantik neve en enor da Itron-Varia-Yeodet⁽¹⁾

War dôn: Daou hent a zo.



I - tron Va - ri - a ar Yeo - det, Bis - kozz den a-man 'neus pe-det, 'neus ho pe - det a ga-lon



vad, hep kaout di - ga-nec'h e ven - nad, 'neus ho pe - det a ga - lon vad, hep kaout di - ga - nec'h e ven - nad.

Diskan

Itron Varia ar Yeodet,
Biskoaz den aman 'neus pedet
'Neus ho pedet a galon vad
Hep kaout diganech e vennad.

I

Aman 'peus gwelet hon Zado,
Aman e taoulinomp d'hon zro
Dirazoc'h, er c'hentan chapel
'Voe savet d'ec'h en Breiz-izel.

II

Breiz neuze na oa ket kristen;
Ar Vro, hep hent, hep gwenojen,
Gant koajou bras oa goloet,
Den enni na vije gwelet.

III

Ha koulskoude en Beg-Leger,
Aman er c'houlz-ze 'oa eur ger
Hanvet gant kalz ker Lexobi,
Ha kalz a dud a oa enni.

IV

Eun de, tud ker 'oa souezet,
Eus eur vag vras oa diskennet
Tud gwisket paour ha dierc'hen,
Kroaz hon Salver en o c'herc'hen.

V

Ni deù, emê, eus a Vreiz-Veur,
Menech Bretoned, ho preudeur;
C'hoant vras hon deus d'ec'h da ziski
Karet Doue, e zerviji.

VI

O c'homz 'voe chilaouet gant stad ;
An had kouezet en douar mad
A dougas frouez; dre c'hras Doue,
Ar bobl voe kristen hep dale.

VII

D'ec'h, Gwerc'hez, fojont da viret
Ar fe devoa neve hadet,
Hag e savjont en hoc'h enor
Eur chapel gaer a-us d'ar mor.

VIII

Ha c'houi 'n hon zouez 'zo en em blijet,
E-leiz ho torn ho peus skullhet,
Grasou Doue war an him
'Zo deut d'ar Yeodet d'ho pedi.

IX

En dro d'ec'h 'n em vodas e-leiz,
Eus a bep tu, kristenien Breiz
O devoa aman, 'vit o ren,
Hag eun Eskob ha beleien.

X

Aman oa Eskob Sant Tual,
Warlerc'h, kalz a Iskibien all;
A'han eo ét, herve lerer,
Kentan Tad Eskopti Treger.

XI

'Neus ken na kër na kalz a dud
Er Yeodet, met beo eo ar vrud
Eus ar burzudou ho peus grêt
Ha ret c'hoaz, Gwerc'hez vinniget.

XII

Eus bro Lanhuon ha Treger,
Aman 'vel gwejall e teuer;
Nag a glavour 'peus paret,
Nag a galon 'peus dizamet!

XIII

Ar Yeodet na vo biken paour;
Ar Werc'hez gant he c'halon aour
A chom aman hag a chomo
Vit hon enor ha mad ar Vro.

XIV

Kalz eus hon zud, war vor, a die
Gonit bara o bugale;
O diwallet, o mamm dener,
Hag o digaset ya'ch d'ar gêr.

XV

Binniget poan al labourer
A vir ar zui 'vel ma teer;
Eus a bep droug miret e dud,
E drevad hag e loened mud.

XVI

Piou a zo deut aman Gwerc'hez,
gant fans en ho madelez,
'Neus grêt a galon e beden
Ha n'an-neus ket bet e c'houlen?

XVII

Gwerc'hez, grêt vo ho Bretoned
Tud a galon, a lealded,
Tud a fe grenv, 'vel o zud koz,
'Vit mont 'velit d'ar Baradoz.

IMPRIMATUR: Brioc, die 28 juli 1934.
V.-M. LE PRESSAT, vic. gen.

(1) Lennet e Buhe ar Zent, p. 918, istor p'ec'hivina] I. V. ar Yeodet.

EUR GONTADENN BEP MIZ

AN DAOU VREUR GEVEL

(Istor eus amzer ar Revolution)

PENNAD DIWEAN

Soaig, en eur arruout, c'houez-dour-dispenn, dialan, e kichen méreger Ar Brondou, en em stokas ouz unan eus an Tangied deut gant e gi hag e fuzuilh da welet ar pezh a c'hoarvee. Klevet en devoa youc'hadennou ha ne ouie pe-tra da zonzjal.

Gant mil boan e tennas digant Soaig eur ger bennak, ken strafilhet ha ma oa ar pôtrig goude e dôl. Kregi reas en e zorn da vont d'an ti hag en eur gerzet, e reas d'ean dibunan e gôz. Po voe fin, an Tangi n'hallas ket harz d'ober eur stard da zorn ar bugel:

— Eur gwaz out! emean: kerz da gousket breman! Grêt teus da lod!

Laket e voe Soaig en e wele ha digaset d'ean kement a c'helle hen lakat adarre prim ha prim war e du. Ar bôtred en em vodas d'en em glevet. Ali Per Brondou a oa lavaret an oferenn, (rak eun dek a dud a oa dastumet er c'harti), mont, ahendall, tri da welet d'ar goadenn, hag unan, gant ar c'hi, a chomje da vesa endro d'ar gêriadenn.

Grêt e voe evelse. Ar beleg a bignas ouz an ôter hag Yvon Pellan ha Mari Brondou, an daou den neve, a zaoulinas er renk kentan.

*

**

E keit ze, an hini eus an tri Dangi a oa chomet d'ober ged a yee hag a deue gant e gi ouz e goste: « Arabad harzal, Marz, a lavare d'ean; arabad harzal, ma c'hi mat! » Ar c'hi a zente.

Eur pennad mat so e valeent evelse; an oferenn a dlee bean tost achu, pa reas Marz eul lamm goude bean rufflet an êr eur pennadig. Tangi a oa kercent war e roudou... Dija ar c'hi a oa krog ouz krog gant eun den hag a glaske skei e gontell ennan:

— « Galv da gi, eme heman ha ne vo grêt droug ebet d'it te. Tapet oc'h holl, nemedout! » Tangi a c'halvas e gi hag a grogas e brec'h ar pôtr. — « Na glevet ket? eme heman — Skrijadennou merc'hed ha bugale a deuas betek d'ê — « Malloz! » eme an Tangi kounnaret. Gant eun tîl penn fuzuilh, e torras e benn d'ar zoudard glas hag e redas da gât an tier. Yvon Pellan ha Mari Brondou a

digoueas gantan o tont ive d'ar red war draou gant liorz penn an ti. — « Kas houman du-ze! ha dizro goude! » eme ar Pellan. Ha war e giz d'ar véreger... Pebez darvoud eta a oa digoueet?

Kentan bandenn ar Re C'hlas, renet gant ar bourreler, he doa en em zispartiet, war bed tîl an eil diouz egile, dre ar parkou, etre pevar c'horn ar gêriadenn, hag a gave hir an amzer pa ne digouee kelou ebet gante da vont war rôk.

'N em vodan rejont, ha dont war gât méreger ar Brondou dre an tu ne oa ket Tangi war c'hed anê... Breman an tiad a-bez a oa etre o daouarn, nemet eun nebeudig o doa gallet 'n em zilân kuit, dre zikour an denvalijenn. Allas! ar beleg a oa ive, bet kroget warnan pa oa oc'h achui oferennan. Breman en doa gwisket e zilhad kouer, hag e oa en traou an ti azeet gant pevar all, an nor serret warnê hag eur zoudard a-ziavêz dindan ar fenestr. E krec'h an ti, ar zoudarded all o devoa laket ober d'ê da zibri ha da evan, eus a gement a oa, rak ar bourreler bihan hag a anavee an doareou, n'en devoa lezet korn ebet heb e furchal. Divizêt o devoa gortoz ar vandenn all, hag ive ar c'hamarad o doa kollet, digare da gargan o c'hof 'vit kaout berroc'h an amzer. Met den ebet na digouee. Ar bourreler a deuas aon d'ean: « Deomp endro! emean, rak n'eo ket awalc'h; n'omp ket c'hoaz e Lanuon! » Nec'het e oa breman, pa ne oant nemet unnek gant seiz prizonier, ar Brondou koz, e vreg hag ar pemp a oa e traou a ti. Karget ar fuzuilhou ha war rôk; ar brizone-rien da gentan hag ar zoudarded a-drenv hag a bep tu. — « Dre ar stêr! eme ar ourreler! Berroc'h eo! »

*

**

War o zeulioù, kercent hag int, daou den a gerze, an Tangi hag Yvon Pellan. Unan bennak a oa tec'het c'hoaz arôk, hep m'en doa gouveet den, Soaig, kuzet en e wele ha lammet ermêz p'en doa klevet ec'h ee ar Re C'hlas da gemer hent ar stêr.

Redek a rê, evel p'en dije gwelet e hent koulz hag an de. Ne oa tamm skwiz ebet ennan ken; mont a rê, hep sonjal perak, pouezet gant ar c'hoant da zikour e dud, e vistri koz, pe da vervel gante. Nemet ha notet e vije bet, ah! nan, ne vije ket chomet en e wele!... War rôk! war rôk!... Hag evelse, Soaig en em gavas gant Per ar Brondou hag an daou Tangi o tont war o c'hiz, goude bean grêt ar furch tro-dro d'ar stêr. N'o devoa kavet an gwelet den: pe e oant bet beuet holl, pe e oant tec'het war o c'hiz da Lanuon... Soaig a lavaras d'ê e oa ar vandenn all o vont d'arruout ha seiz prizonier gante...

Penôs ober? Kouean war ar Re C'hlas, breman soudan,

pan arrujent war ribl ar stêr? Per Brondu a lavaras adlakat ar goadenn en he flas. « An de 'zo arru! emean; ar Re C'hlas, a dra zur, a dremeno, darn anê, da gentan, hag ar brizerien goude. Pa vo beuet pevar pe bemp « glas », ni deui a-benn eus ar re all! » Ha mat! Hag eun Tangi an hini brasan eus ar bôtred, en dour betek e ziougroazel hag o sevel penn ar goadenn e doare ma veze kredet ne oa ket bet troc'het. An tri den en em guzas neuze, ar biz war bluenn o fuzuilhou...

— « Arru int! » eme Soaig, tanavoc'h e skouarn eget re ar re all. E penn ar goadenn, ar vandenn o chomas a-zav. Piou yaje da gentan? Ar bourreler a lâras neuze: « Arabad ec'h afe hon zud e-kuit! Et tri, en o rôk, hag int, pa vet tremenet, a yelo warlerc'h. » Pebez dizamm!... Setu tri C'hlas o lakat troad war ar goadenn... Harpet mat e oa, marvat, rak ne gouee ket. Neuze, souden, an Tangi vras a lammas eus e guz hag arôk m'o doe sonjet ar Re C'hlas enebi outan, e tanfoeltras en dour, gant eun töl troad, ar goadenn hag an tri tremener. An daou bôtr all o doa kerkent diskarget o fuzuilhou ha diskaret daou zoudard ouspenn. Ne chome ken nemet c'houec'h: ar brizerien a oa lampet warnê, ha helebini kas gout piou a helpennje egile er stêr... Yvon Pellan hag an Tangi a oa diredet d'an tennou hag a roas sikour d'ar re yousttan. An toull-tro, epad eur c'hart eur, na baouezas da dourlonkat...

Pa voe fin d'ar gann ha pa 'n em gontas an dud, hini ebet eus Toull-ar-c'horrig na oa diantket; gloazet, avat, ne lâran ket. Brondu koz a oa torret e c'har hag e vab en doa tapet blonsadennou war e holl izili. An holl soudarded c'hlas a oa bet lonket gant ar poull-tro.

Ar beleg a lavaras warnê eun *De profundis*, rak eun enebour êt dirak Doue n'eo ken nemet eun anœon din a drue.

X...

Piou bennak a gar kanan, prenet :

SONIOU FEIZ HA BREIZ:

8 real al levr

MOUEZ MENEIOU KERNE:

18 real dre ar post.

KANAOUENNOU AR BLEUN-BRUG:

22 real dre ar post

BLEUNIOU YAOUANKIZ (AR YEODET):

20 real dre ar post

Administr. **Arvorig**, 15, rue des Capucins, Guingamp.

Eun devez eus buhe Breiz

Kinniget gant doujans d'an Otrou MEN, person Gwengamp.

Ar pezh-man a dremen e fin ar V^o kantved, e Breiz-Vihan; eun dôlenn eo eus amzeriou kentan Breiz, pa voe adsavet, gant kristenien Breiz-Veur, goude pleustr ar Romaned ha flastr ar Varbared.

Breiz-Veur, hirie Bro-Zôz, a oa, pell arôk donedigez Hon Zalver dalc'het gant ar Vretoned. Ar Romaned a skoas betek enni hag a reas epad 300 vîà d'ar Vretoned plegan dindane. Er blâ 407 e tec'hjont kuit.

Pobladou goue, Piktet ha Sôzon, a deuas neuze d'o zro, dre vor ha dre zouar. Ar stourmad etreze ha Breiz a badas 200 vîà (455-655). Unan eus ar gwasan emgannou a voe emgann *Kaltraez*, a badas seiz devez, diouz ar meurs de kentan a vae, betek al lun warlerc'h. Tri-c'hant triugent prins breton en em gave eno gant o zoudarded. Ar pevar de kentan, ar Vretoned a drec'has; ar yaou da noz, avat, ar roue Menezok, o mestr bras, a reas eur pred da zibri ha da evan kement ha ma kare pep hini. Ar Vretoned en em vévas hoill. An enebourien a goueas warnê hag a lazas kement anê, epad tri de, ma ne chomas, d'ar fin, nemet unan war gant.

(Gwelet: Les Bretons insulaires et les Anglo-Saxons gant A. de la Borderie).

Ar pezh-c'hoari-man a zo tennet, lod ac'hane ha lod eus istor Breiz-Vihan. Bet eo c'hoariet en Boulvriak gant c'hoarierien an O. Loyer, kure, a roas dorn d'e zevel.

**

ROLL AR C'HOARIERIEN:

TALIESIN,	} drouized.
KADOUR,	
MADOK,	
KATUOK,	} servijerien an drouiz koz Taliesin.
TUDI, kristen.	
EUR ZORSER,	
ARZULIG, diskibl an drouiz Taliesin.	
BRIAK, manac'h breton.	
MAEL, manac'h yaouank, kenvreur Briak.	
DEROK, prins an Domnone.	
SEVA, merc'h Derok.	
KANNAD DEROK,	
DOUGERIE	
BUGALE,	

ARVEST I

An arvest-man a dremen en eur c'hoad, dindan ar gwe, en eul lec'h hag a zo ennan mein sounn hag eun dolmen.

DIVIZ I

TALIESIN, e-unan, da c'houlou-de, azeet, e benn etre e zaouarn. O sevel e benn: Kaltraez! Kaltraez! Biken diwar ma spered na dec'hi! Ennout e sonjan an noz, ennout e sonjan an de!... 'N em c'hreiz 'teus toullet eur gouli dôn evel eur puns hag ennan andon c'houero ar glac'har na ra, beb eur, nemet kreski!... Kaltraez! Kaltraez!... (Tevel 'ra) Ra varvin kentoc'h pa n'ouzon ken ober netra nemet gouelan 'vel eur plac'h!

O prinsed o c'helc'hiou aour, niverus ha kaer evel bannou an heol, pelec'h oc'h? Gwisket ganac'h hoc'h armou lugernus, c'houi oa en Kaltraez henvel ouz an tân-flamm war ar mene!

Tri c'hant e oant, prinsed o c'helc'hiou aour, ha triugent ouspenn, ha, gant pep hini, soudarded da lakat an douar da grenan, pa gerzent... Tri de o deus neuiet 'barz ar gwad, gwad ar Pikted milliget; tri de all o deus stourmet; an de diwean, war gant, ne chome ken da gemer hent an distro, nemet unan!...

Owen, Menezok, Tudvoule'h, pelec'h oc'h, brezellourien galloudus, peulioù dero hag a zalc'he ma Breiz en he zav? Pelec'h oc'h, gwad, buhe, nerz ma Bro?

Petra ran me o chom beo warlerc'h ar re-ze? Gouzout e oant du-ze, 'vel eur vagor grenv, e tu all d'ar mor, a lake nerz ha frealz 'n em c'halon... Ha breman!

Ah! badeet e oant! Lezet o doa lakat war o zal ar merk a ra d'an dud mervel! N'eo ket ar Pikted o deus trec'het warnê! Gant ar groaz int bet touellet! Oh! ma vijen me bet eno! Me 'm ije hen diframmet diouz o c'herc'hen ar merk hudur, sin ar groug, arwez ar sklaved!...

DIVIZ II

TALIESIN — ARZULIG

Arzulig. — Tad, chilaouet ho mab, me ho...
Talsin. — Tec'h alese! ke d'en em rei d'ar c'housked, te hag a gousk! ke kuit, prenv, fank, labe, ke kuit! Me kousket? Daoust hag an tân a gousk? An tân a zo 'n em gwazied! Ma ene a verv 'n em c'hreiz! Evet am eus an holl wad skuilhet ha meo on gantan!... Petra eo d'in an noz? Petra eo d'in an de? Petra eo d'in-me ar blâ hag e amzeriou? Et on e peurbadelez ar Glac'har! Glac'har! Glac'har! Glac'har! n'eus ket ken evidon, pegwir ma Bro he deus kollet he c'horf ha kollet hec'h ine!...

Kouean 'ra war ar men elec'h ma oa azeet breman souden. Goude eur pennad:

War zao, drouiz! Drouiz out pe nan out ket? Sav ta ha bale! Te hag a zisrann hag a varn, te an hini a rann ar bara hag a vag ar ouenn, n'eus bec'h pounner ebet evidout! Bepred trec'h! Stourm ouz ar boan; trec'h warni... daoust pegen didalvoud eo an trec'h-ze!...

Mont ra ermêz.

DIVIZ III

KADOUR — ARZULIG, o tont.

Arzulig. — Aboue am eus digemmet d'ean ar c'helouze, tri de 'zo, n'en deus na debret nag evet, na kousket... Biken e nerz n'hall padout!

Kadour. — Dalc'h tost d'ean, bugel; n'hen lezez ket e-unan...

Arzulig. — Kas a ra ac'hanon kuit gant komzou hag a ra d'in krenan, krenan gant aon na vefe troet e spered!...

Kadour. — Paour kez Tad!... D'e oad, gwelet kemend all! Marteze, da vihanan, Madok, Katuok ha Kenan, an tri gannad all, a zigaso d'ean gwelloc'h kelou.

Arzulig. — Allas! poan am eus o kredi! Ar bed evidompi ni a gerz war an tu gin!

Kadour. — Ya, eun amzer a zo bet plen, sioul, kompez, amzer ar peuc'h vras, pa oa Rom o ren... Achu eo gant an amzer-ze. Rom a goac'h hag a gil e pep lec'h. Piu 'ta a ren breman? Ne welan nemet brezel, dizurz ha spou-ron dre holl. Eun dra zo, koulskoude, estlammus da glevet: komz a rêr eus eun den hag a oa Doue hag a zo bet marvet war eur groaz!... Klevet 'teus doare ebet a ze, Arzulig?

Arzulig. — Ya, tad, etouez hon tadou Breiz-Veur, ar groaz a zo dre holl anaveet.

Kadour. — Setu perak int bet trec'het... Ar c'hroug euzus-ze, petra eo ken nemet eur zeblant a varo! Penôs o deus gallet, int, mibien an heol, mibien ar vuhe, digemer eur seurt spontailh? Red eo stourm, Arzulig, eneb ar spered-ze a ziskarr ar broiou, o flastran dindan dreid pep buhe ha pep gened! Ec'h an da glask an Tad; konforti anean a renkan ha kemer ali digantan diwarbenn ar pez hon deus d'ober...

Mont a ra ermêz

DIVIZ IV

ARZULIG, e-unan.

Petra 'm ije grêt? N'hallen nemet lavaret ar pez am oa gwelet ha klevet! Ha c'hoaz tavet on bet war galz, betegout... Ma mestr, ha gouzanvet en dije bet klevet muioc'h? Aboue kant hanter-kant vlâ, hag ouspenn, m'eo krog ar brezel, hon breudeur n'o deus grêt kammed ebet war rôk. Ar Zôzon hag ar Pikted eo a deu warnê hag a beg a damm da damm war o douarou, 'vel ar mor o kri-

gnat an òd. Gwelet am eus bet du-hont Barz ar roue Urien, en eur gouel lec'h ma redast evel an dour, ar chufere melen: « Ah! emean, gwazed Breiz, didrec'husan tud a zo, mar ouijent kerzet a-unan!... Petra eo eun dakenn dour? Hogen, petra eo ar mor, pa zav, poulzet gant an avelioug? Ar Zòzon a zo 'vel ar mor ha c'houi, rec'hel Breiz, hini ha hini, c'houi 'vo 'dismantret! »

Ma c'halon a rann 'n em c'hreiz, rak klevet a ran hekleo an tu-man d'ar mor o respont glaz da hekleo an tu-all.

Setu ma mestr hag an drouiz Kadour!

Tec'hel a ra.

DIVIZ V

TALIESIN — KADOUR

Taliesin. — ...Nan, hon lezenn ni, drouized, n'eo ket evel hini an dud a vrezel skei ha fountan mestr dre ar c'hleze. Hon lezenn ni eo kelen ha lakat ar furnez da ziwan ha da vleunia endro d'imp, e kalon mab den. Bez sonj a ze, Kadour!

Kadour. — Salokras, tad, ho tislaret a renkan. Red eo d'imp hirie kemer eul lezenn neve, lezenn an nerz; stourm dre nerz pe vervel.

Taliesin. — Torret eo ar c'hleze en hon dorn, siouaz!... O Kadour, pelec'h eman hon brezellourien?

Kadour. — O tad, pelec'h eman hon diskibien?... Digouezet eo an amzer diouganet gant Mòn, an drouiz fur...

Taliesin. — Siouaz!...

Kadour. — Me davo, rak arabad d'in pouezan re war ho kouli.

Taliesin. — Komz ha bez dinec'h! An drouiz a oar gouzanv ha bean trec'h d'e boan.

Kadour. — Sonj ho peus, war e wele maro, pesort tölenn e tizoloas dirak hon daoulagad? Me oa yaouank d'ar c'houlz-ze, met kement komz a lavaras a zo chomet merket 'n em c'hreiz skrivet gant eur bir. Eur pennad aròk ma varvas, e savas en e goaze hag e tigoras frank e zaoulagad sklér evel diou c'holaouen. — « Deus d'am c'herc'hat, emean, o maro, deus ha kloz mat war ma lerc'h dor ar bed-man ma ne glevin ket e tu all d'ar be, klemmou ma zud!... Rom he deus diframmet ar gurunenn diwar benn an drouiz; an dro-man me wel diframman diouz e greiz e galon!... Ar gristenien! ar grisfenien! »

Astenn a reas e zivrec'h, n'ouzon ket pe evit briata pe evit pellat dioutan ar pezh a wele. E zivrec'h digor, e soublas e benn hag e varvas. Mat mar en deus ar maro serret kloz war e lerc'h dor ar bed-man, anez en dije klevet alies hon huanadou.

(Da heuilh).

L. M.

ARGOAD-ARVOR

Ar prijou. — Neve vet ar prijou er skoliou, bihan ha bras. An de-ze eman ar c'hustum da rei eun tamm di-duamant d'ar gerent ha d'ar vugale. Bet e oa koulz, aròk ar brezel, ha meur a skol a oa deut ar c'hiz gante da rei, da vihanan de ar prijou, dor digor d'ar brezoneg. Eur pezig bennak a veze c'hoariet, eur zòn bennak kanet dirak ar gerent a dizroe holl laouen d'ar gêr, intentet gante eun dra bennak. Muioc'h distank eo hirie ar skoliou-ze a lak eun tamm klask warlerc'h ar brezoneg. Skouer vat an neus roet war ze skol gristen Bear a c'hoarias **Kolas bihan medisin** ken beo ha ken c'houek ma voe eun dudi 'vit an holl.

— En skolaj an Iron-Varia, Gwengamp, an O. Ker-gus, person Panvrit, a oa e penn ar gouel. Eur yec'hed a voe klevet e brezegenn belavar; eul levenez klevet hanvan prijou ar **Skol vrezoneg** ha kanan, d'achui ar gouel, **Bro Goz ma zadou.**

BOULVRIAK. — **Pardon an Otrou Sant Briak.** — Trizek kant vla 'vo souden boue m'eo pedet an Otrou Sant Briak en parrouz Boulvriak. Enor d'ar parrouziou a ehom ken feal d'hon Zent koz! N'eo ket war vihanaat ec'h a, daoust d'ar hir amzer, karante Boulvriakiz e kenver o fatron; hen diskouet o deus adarre er bla-man. Netra bravoc'h evit gwelet an dud o vont da bokat d'o zant koz, war e zioujud, an de-ze, aròk kuitat e iliz. Kalz a draou kaer, neve darn ané, a ve klasket bep bla evit kreski lidou ar pardon, (hag ar bla-man muioc'h 'vit biskoaz), met netra na dalv ar c'hiziou koz-ze bet miret a beb amzer. Etouez an neventiou, eur blijadur oa gwelet ardameziou kestel koz ha maneriou Boulvriak stiguet dre holl en iliz.

Eun dra hag a zo èt don ive e kalon S. Briak eo gwelet binniga Be meur ar zoudarded marvet er brezel; disul, evit gwir, e voe badeet, e kreiz melkoni ha levenez an holl.

An O. Saintdrenan, person Magor, an neus grèt er bla-man meulodi Sant Briak ha kresket c'hoaz, en doare-ze, brud e bardon.

LANUON. — **Sko'aj Sant Jozef.** — E Skolaj Sant-Jozef, Lanuon, an O. Pennee, vikèl-vras, a renas gouel ar prijou, endro d'ean personed bras an Eskopti. Klevet e voe gantan komzou talvoudus, ar seurt m'eo mat d'eur pôtr yaouank klevet aròk mont e konje.

Etouez ar prijou goneet gant ar skolaerien, eman, dreist-holl, ar medalennou kinniget gant kevredigez Labourerien-douar Frans d'ar 6 pôtr yaouank ar muian barrek war al labour-douar. Ar re-man 'zo kenteliet gant an O. Bonniec, eur mestr war ar vicher.

PEDERNEK. — Kleier neve :

En Pedernek 'zo neventi,
Peder goulm wenn neve c'hanet
D'an Otrou Doue 'n e c'houldri ;
Er barrouz holl 'zo joaüsted.

Ar joaüsan, a dra zur, a oa an ôtrou Bris, person, o klevet harpet ha kresket e vouez gant mouez pevar gloc'h neve. Laouen oa ive o welet endro d'ean holl dud e barrouz unanet ha mignoned diredet a bep tu. An Otrou Pennee, vikel-vas, a oa ar badezour; ober a reas eur brezegenn en eur brezoneg ken flour ha ken yac'h ha mouez ar c'hleier neve.

Kelaouennou brezonek miz gouere

(Kloerdiou Kemper ha Roaön)

- **Kannad Kenvreuriezh ar Brezoneg e kloerdi Kemper,**
-- an diverran (résumé) eus al labouriou grêt gant ar genvreuriezh e kerz an hanv. Lenn er miz a deu eur pennad diwar Bretoned Paris, tennet eus ar c'hanad-man.

*

**

Foi-Bretagne, — (Skrivan d'an Otrou H. Poisson, 18, rue Saint-Michel, Rennes.) Kelaouen c'hallek kloer Roaön, enni studiou a bouez vras, war an doare ma voe diframmet digant Breiz he frankiziou er blâ 1789; — war galvedigez ha spered ar Vretoned; — war ar Vroadelez vreton (nationalisme breton).

Piou bennak a gar lenn istoriou gwir, treo burzudus prenet :

CHRISTO :

20 real dre ar post

Ma Beaj Jeruzalem :

17 real dre ar post

15, rue des Capucins, Guingamp, c/c 44-38 Rennes.

**AR GALLEG
DESKET DRE
AR BREZONEG ⁽¹⁾**

SAVOIR

Indicatif présent : je sais, tu sais, il sait, nous savons, vous savez, ils savent.
Imparfait : je savais, tu savais.
Passé simple : je sus, tu sus, il sut.
Passé composé : j'ai su, tu as su.
Futur : je saurai, tu sauras, il saura.
Subjonctif : que je sache, que tu saches, qu'il sache, que nous sachions, que vous sachiez, qu'il sachent.
Impératif : sais, sachons, sachez.

GOUZOUT. — GOUVEOUT (1), GOAROUT

Indicatif présent : gouzon, gouzout, goar, gouzomp, gouzoc'h, gouzont = me a oar, te a oar...
Imparfait : gouien, gouies, goule, goulemp, gouiec'h, gouient, = me a ouie...
Conditionnel : goufen, goufes, goufe, goufemp = mé a c'houfe, te a c'houfe.

POUVDIR, GALLOUT, GELLOUT

Indicatif présent : je peux (je puis), tu peux, il peut, nous pouvons, vous pouvez, ils peuvent.
Passé simple : je pus, tu pus, etc...
Passé composé : j'ai pu, tu as pu.
Futur : je pourrai, tu pourras, il pourra, nous pourrons, vous pourrez, ils pourront.
Subjonctif présent : que je puisse, que tu puisses, qu'il puisse, que nous puissions, que vous puissiez, qu'ils puissent.

VOULOIR

Indicatif présent : je veux, tu veux, il veut, nous voulons, vous voulez, ils veulent.
Futur : je voudrai, tu voudras, il voudra.
Subjonctif présent : que je veuille, que tu veuilles, qu'il veuille, que nous voulions, que vous vouliez, qu'ils veuillent.

FALLOUT, FELLOUT

Indicatif présent : me a fell d'in, te a fell d'it, hén a fell d'ean, etc...
Fellout a ra d'in, fellout a ra d'it, fellout a ra d'ean.
Imparfait : me a fell d'in...
Passé simple : me a fellas d'in...
Passé composé : me am eus fellet d'in...
Futur : me a felle d'in.

(1) Gouveout et goarout sont réguliers et se conjuguent comme karout.

VOIR

Indicatif présent : je vois, tu vois, il voit, nous voyons, vous voyez, ils voient.
Imparfait : je voyais, tu voyais.
Passé simple : je vis.
Passé composé : j'ai vu.
Futur : je verrai, tu verras, il verra, nous verrons.

DEVOIRS

Phrases à rétablir. — Le cheval, touffu, se cache, essoufflé, un chêne, sous. — Une fille, d'habits, en haillons, élégante, ne se vêt pas. — Le son argentin, vint, d'une cloche, à travers, à nous la vallée retentissante. — Aux gens, largement ouverte, la porte, laissez, nécessaires. Le pain, à ceux qui ont faim, quotidien, donnez. ... Etourdis, vifs e tremuants, sou-vent, sont, les enfants. — Dans le clocher, une tourterelle, aujourd, hier, plaintive, j'ai entendu. — D'épouvante, balance, houleuse, la mer, blêmes, les matelots. — Fréillants, veni-meuse, une vipère au lieu de poissons, desséchée, dans la rivière, nous vîmes, se glisser. — Une pluie abondante, grasse et gluante, la terre, rend. — Inodore et sans saveur, cette source, de l'eau, donne. — Un sanglier, abrupt et lisse, fu-rieux, un rocher, a escaladé. — Une maîtresse de maison soi-gneuse, à ses gens, âcre et trop rassis, de pain, ne donne pas. — Un cheval, quand il est libre, châtouilleux, n'est pas facile à saisir et à tenir. — J'ai vu, merveilleuse, immense, dans le ciel, une chose. — Des nouvelles, à vous donner, j'ai tristes. — C'est pitoyable, si désordonnés et si insensés, des gens si re-nommé, de voir. — Bien attifé, le petit est : frisés, et rouge vif, ses joues, ses cheveux, sont. — Comme un mort, pâle, quelquefois, il devient, si grincheux, et si vif, il est. — Victo-rieux, est-ce qu'il a été? — Est-ce qu'il ira, ses vaches, pâtre, mener? — Ses œufs, la poule, ne couvrera pas, est-ce que?

Lavarennou da urzian. — Ar marc'h, bodennek, 'n em guzas, d'alan, eun derven, dendan. — Eur plac'h, dillad, druilhennec, kempen, na wisk ket. — Zou skintlin, a zeuas, eur c'hloc'h, a dreuz, d'imp, an draouien hegleo. — D'an dud, digor frank, an nor, lezet ezomnek. — Ar bara, d'ar re o deus naon, pem-deieck, roet. — Buhezec ha drant, alies, a zo, ar vugale. — En tour, eun durzuel, dantelezet, dee'h, hirvoudus, am eus kle-vet. — Gant an aon, a vransell, koumnek, ar mor, morlivet, ar vartolod. — Fich, flich, vunumus, eun aer, elec'h pesked, hesk, er waz, a weljomp, en em zilan. — Glao puilh, dru ha pegus, an douar, a laka da zont. — Dic'houez ha divias, ar vammen-man, dour a roa. — Eur penn-moc'h gouez, plomm ha klus, fumet, eur roc'h, an neus krapet war lein. — Eur penn liegez akelus, d'he zud, trenk ha re diaze, bara, na ro ket. — Eur jo, eur wej digabestr, hilligus, n'eo ket ez da dapout ha da zere'hel. — Am meus gwelet, burzudus, divent, en oabl, eun dra. — Kelou, da rei d'ac'h, am meus, ankenius. — Da-mantus eo, ken diroll ha tretlatet, tud ken brudet, gwelet. — Stummet mat, an hini bihan, eo: rodellek, ha ru beo, e zioujod, e vlev, a zo. — Evel eun den maro, glas, awejou, ma teu, ken skrignek ha ken ter eo. — Trec'h, hag-hen eo bet? — Ha mont a rei, e zaout, da beuri, da gas? — He uiou, ar yar, na e'horo ket, daoust ha?

Institution Notre-Dame. — Les Capucins
GUINGAMP

L'INSTITUTION offre aux familles, avec une éducation chrétienne :
 Un cours de LATIN préparant au Grand Séminaire et au Baccalauréat ;
 Un cours de FRANÇAIS avec enseignements spéciaux d'Agriculture
 et de Commerce ;
 Un cours de BRETON pour les élèves qui le désirent.
PENSIONNAT & EXTERNAT

E GWERZ : 15, rue des Capucins, Guingamp, Administration d'Arvorlg.

Levr **Buhe ar Zent** : 6 fr. 50; 7 fr. 50, dre ar post. Adalek c'houee'h : 6 fr., hag ar frejou kas ouspen.

Christo 5 fr.; 5 fr. 50, dre ar post. Diskenn-briz pa vo pre-net c'houee'h war an dro. Ar c'haeran levr moulet e brezoneg.

Mouez Menelou Kerne gant Filomena Cadoret : 16 real. — (18 real dre ar post).

Kanaouennou ar Bleun-Brug 1922 : 20 real; — (22 dre ar post).

Oberou an O. Clerc (Kloareg-ar-Wern) : Grammaire bre-tonne : 16 real (4 fr.); 4 fr. 60 dre ar post; — **Beaj Londrez** : 8 real (2 fr.); 2 fr. 60 dre ar post; — **Beaj Jerusalem** : 14 real (3 fr. 50); 4 fr. 25 dre ar post; — **Le Breton dans l'enseignement secondaire** : 15 gwennet dre ar post.

Vocabulaire français-breton (Vallée), broché 6 fr. franco recommandé.

BREIZIZ, LENNIT :

— **Marc'hekadenn Atepomaros, gant X^e**. Priz : 4 real;

— **An « Notennou diwarbenn ar Gelted koz hag o sevenadur »**.

(12 levrig gant peb a c'heriadur). Priz : 8 real pep-hini.

E ti an Ao. Roux, S^e Hélory, Pordic (G.-du.N.).

Pommiers à Cidre
 Arbres Fruitiers
 Forestiers
 et d'Ornement

J. LIBERGE
 Horticulteur - Pépiniériste
 RUE SAINT-NICOLAS
 GUINGAMP R. C. 81

Plantes à fleurs & à feuillage | Graines potagères & fourragères

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
 o embann en « ARVORIG »

Maison de Confiance réputée comme vendant Bon Marché

R. C. Seine n° 36.204
R. C. Guingamp n° 352

AUX

Téléphone 29

DAMES DE FRANCE

35-37-39, Rue Notre-Dame, 35-37-39

— 0 — GUINGAMP — 0 —

TOUS LES TISSUS

Vêtements pour Dames et Messieurs

— CHAUSSURES —

Meubles - Ménage - Chauffage

⇒ ARTICLES DE PARIS ⇐

Rayons les mieux assortis de la Région

Envoi franco des Catalogues sur demande

LIVRAISON DANS LA RÉGION
PAR SERVICE AUTOMOBILE

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
o embann en « ARVORIG »

TÉL. 1.50

R. C. 127

A L'ALLIANCE D'OR

Chèque postal
3933 NANTES

Horlogerie - Bijouterie - Orfèvrerie - Joaillerie

J. LARGENTON

GUINGAMP -o- 7, Place du Centre -o- GUINGAMP

Grand choix de Bagues
et Bijoux or pour Mariages

ORFÈVRERIE

Gallia, Christofle, Boulenger, Ercuis

CHRONOMÈTRES

Omega, Zenith, Lip, Lengine, Moeris, Cyma

LUNETTES

PINCE-NEZ

Horloges et Pendules répétition
de première qualité

Garnitures et Pendules de cheminée

Bijoux "FIX"

Carillons Westminster sonnant les 4 quarts
depuis 420 francs

Grand Choix de Pipes **GBD**

ATELIER DE RÉPARATIONS

Yves COJEAN

Rustang-Guingamp
R. C. 371

Travaux de PLÂTRE
et de CIMENT

Vente de Matériaux :
Chaux, Plâtre, Ciment

QUINCAILLERIE
Articles de Ménage

Alain MENGUY
François ROYER
SUCESSEUR

11, rue des Ponts-St-Michel
GUINGAMP
R. C. 834

LÉON

Marbrier-Sculpteur

Rue de la Trinité
GUINGAMP

CALVAIRES
MONUMENTS FUNÈBRES
en tous genres

CADOUDAL-LE GALL BOURBRIAC

Avant tout achat de...

Téléphone N° 4

Quincaillerie, Fers, Tôle ondulée, Machines agricoles,
Bois et Matériaux de construction, Engrais.....

Consultez-nous

R. C. Guingamp N° 1299

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
o embann en « ARVORIG »

BUHEZ BREIZ

Revue bilingue d'action bretonne

:- Mensuelle :-

Abonnement : 12 francs

Le numéro : 1 fr. 25

Administrateur : M. J. OLLIVIER,
17, rue de Brest, Landerneau.

C. C. 3.248 Rennes

DIHUNAMB!

Dastumaden miziek

groeit aveit Breihiz er Morbihan

10, rue du Gaz, LORIENT

PRIZIEU. — Un Niveren : dek
blank. — Er Bléad : Eit Breih :
20 real ; Eit Bro Frans : 2
skeuid ; Eit er brôieu aral :
7 livr.

ÉLECTRICITÉ

Installations - Réparations

Lumière, Force Motrice,
Sonneries, Téléphone

Louis LE POUULLOUIN

12, Rue de la Trinité
R. C. 2873 GUINGAMP

MONUMENTS FUNÉRAIRES

AUFFRAY

Marbrier - Sculpteur

43, rue Saint-Nicolas, 43

— GUINGAMP —

R. C. 801

Succursale à PAIMPOL

Louis LAVANANT

Ornements d'Église

Rue Joseph Morand

— LANNION —

R. C. 373 Lannion.

Veuve Pierre HAMON

BOIS DE CHAUFFAGE
:: :: CHARBONS :: ::

Sabots - Chaussures - Chaussons de Strasbourg
31, rue des Ponts-Saint-Michel

GUINGAMP :-

R. C. 34

FABRIQUE DE PARAPLUIES

CANNES - OMBRELLES

Réparations - Recouvrages

M^{me} RUELLAN

15, Place du Centre, 15

R. C.

- : GUINGAMP

UNION AGRICOLE

GUINGAMP R. C. 618

a bren avalou-douar
a bep sort.

Chaussures en tous Genres

A. QUEILLÉ

47 - Rue Notre-Dame - 47

R. C. 712 GUINGAMP

Sabots en gros :- Réparations

PEKARA. CIMENT

chimique,
inoffensif, permettant de boucher soi-
même les trous dans les ustensiles de
ménage. Il résiste au feu et à l'eau
bouillante. Colle porcelaine, faïence,
etc., sauf verre et caoutchouc.

La boîte, franco poste, 2 f. 30

Ecrire à Loeiz ar Floch, au Prat,
en Lannitis (Finistère).

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
o embann en « ARVORIG »

EMILE MONJARRET

Place Saint-Sauveur — GUINGAMP

FABRIQUE de MEUBLES de STYLE, BRETONS et MODERNES

Chêne, Noyer, Acajou, Bronze, Miroiterie

TRAVAIL GARANTI

PRIX MODÉRÉS

Coutellerie LAËS

R. C. 416 5, Place du Centre - GUINGAMP

Repassage, Réparations tous les jours

Travail soigné, garanti

V. CARON

R. C. 397 COIFFEUR-PARFUMEUR
GRIMES POUR SEANCES

Salon de Dames

O. dulation - Shampoings - Manucure

23, rue Notre-Dame — GUINGAMP

R. C. 34 Restauration de Meubles de tous styles
Meubles Bretons

Eugène LEMIEUX Fils

Rustang — GUINGAMP

Meubles neufs et d'occasion

LORGERÉ-SOUDER

R. C. 447 46, rue Notre-Dame — GUINGAMP

Epicerie — Spécialité de cafés

QUINCAILLERIE

Joseph L'HOSTIS

Ruello — GUINGAMP

Rouennerie, Confections, Chaussures

Mercerie — Epicerie

TURQUET

R. C. 533 Carrosserie - Charronnage

Sainte-Croix — GUINGAMP

Edouard PERLIÉ

GUINGAMP

R. C. 403 LIBRAIRIE CLASSIQUE

Musique et Instruments

PROCURER TOUS LIVRES BRETONS

TEINTURE - NETTOYAGE - APPRÊTS

Deuil en 24 heures

J. AUNEAU

15, rue Saint-Yves — GUINGAMP

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
o embann en « ARVORIG »

R. C. 778

R. C. 533

R. C. 403

R. C. 506

Lustrerie Bretonne

Ancien et copie d'Ancien —
— Installations Électriques

E. LECOQ & J. DUCHEMIN

Ingénieur-Électricien

30, rue Notre-Dame — Guingamp

Téléphone 0. 91.

R. C. Saint-Brieuc 4082.

HOTEL DE LA GARE
GUINGAMP

M. SIREY, Propriétaire

CHAUFFAGE CENTRAL — ÉLECTRICITÉ

SERVICES PAR PETITES TABLES

Téléphone 19

R. C. 3010

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
o embann en « ARVORIG »

FERS - CHARBONS - FONTES

ARTICLES DE MÉNAGE

Quincaillerie

Y. FILOUX

34, Place du Centre, GUINGAMP

Grand choix de FOURNEAUX de tous modèles

Chapellerie

GROS — DÉTAIL

Chapeaux, Ecclésiastiques

CASQUETTES D'UNIFORME


E. PLAIRE Fils

29, rue des Ponts-Saint-Michel

GUINGAMP

R. C. 395

Ma brenet eun dra bennak e ti an dud-man, lâret ho peus lennet
o embann en « ARVORIG »



SOCIÉTÉ GÉNÉRALE

pour favoriser

le développement du Commerce et de l'Industrie en France

SOCIÉTÉ ANONYME, CAPITAL : 500 MILLIONS DE FRANCS

R. C, Seine 61.462.

Agence à **GUINGAMP**, 32, Place du Centre

BUREAUX PERMANENTS ;

LANNION — PAIMPOL — TRÉGUIER

BUREAUX AUXILIAIRES :

Perros-Guirec — Pleubian — Pontrioux — La Roche-Derrien

Toutes opérations de BANQUE et de BOURSE. — Dépôts de fonds à vue et à échéance fixe
Placement et Escompte des Bons de la Défense Nationale

BREST. — Moullerez ar C'hazetennou Katolik, ru ar C'hastell, 4.